

CHANSON DES COLLABORATRICES IN BREZONNEC

1

Ama epad ar brezel a memp goueled a ne
Eur certain merhet yoanc ag eur certain groague.

Refrain : Eoar ponchou Paris
Merhet a voant ket kuis
A collabori franchement
Gand ar baotred vaillant

2

Ia collaboret a deuz a corf ag e galon
Goueloc'h e cavind eur boche o ia vit eur breton

O ia bars eur parcou
Vije a rendez-vous
Gred gand ar frigolin
O na merhet Pétain.

3

Gred a deuz gante converse in tout ar fessonnou
Deibi reont ar gateaux, evan ar boissonniou

Ar paoukès francijen
Starde o ceinturen
Ag a zebe bara du
A hep cavet guin ru

4

A hoas a de a hirie a he uel o fen
Pa neoket bet ar cizail eoar o feruquen

Gred a deuz afferiou
A gered millionnou
O ia gand paotred Hitler
A zo bet amzer guer

5

A pe voant eru ama a Americaned
Et voant bars ar pen kentan mestrezet ar bochet

Prest a voant adarre
D'ober converse gante
Ia ar merhet faro
Oa ru deus o guino

6

Arog an dutt a fesson fot de bean partout
Hardi oh evit bleizi a hoas na reont ket fout

Pe eur boche pe a russet
Gand a véant carresset
Ar merhet didalve
Eoa bars ar vro me

7

Monet reint da vale oar varc'h a bars in train
Mar plich ebars in eil classe ia gand ar frigolin

Darn a heait dar parc course
Evit ober danse a ours
Non trompint ket da choas
Dalc'h mad eur mestrou bras.

8

Bean oa merhet gentil o ia bars ar vro me
Kasset a vije café dar boche bars ni ouele

Ar paourkes patriote
Nag a zo bet eur zod
A kousket ar parcou
A traited deur voyou.

9

Goueled a memp a nom bro ia kalz a verhet koant
Verzan o hamaraded dar bochet franchement

Neuze ar francisjen
Dappe eur lardaden
Kaeite oa ar merhet faro
Soignal bochet nom bro

10

Breman pa heont da vale deuz tout toiletten guer
Car gered a deuz paper ia gand paotred Hitler

Pa vo ket kin arhent
Neuze vo chancement
Car red a vo labourat
Ben kat toiletten vad

11

Glahar neuz merhet Vichy yoanc a dimeet
Aboe eo fin dar brezel a collet ar bochet

Deusket ken a souten
Ag a réont pinijen
Nag a mant noz a dé
Pedi ar croix gammée.

12

Soueted a deus ar victoire ia da Allemanted
Car ama ebars in Bretagne a hint bet goal soignet

Duman ebars in kaer
Heait viou bars ar belouer
A souhaited la guerre
Ag ar victoire d'Hitler.

LE GAC René.

Kanaouen an daou Bourreaux

1

La caille, la tourterelle et la jolie perdrix
O qui chante pour Hitler et pour Mussolini
O qui chante pour Hitler et pour Mussolini
A renez a gaff dime a he a daou vrassan bandits.

2

Bars eur bloa nao-a-tregon, an dri a vis gwenholo
E oa declaret dimp brezel gant Hitler a Musso
Gered e oa tout an dad, o ia in barz an arme
A bet kasset dar frontiere, pad ar goan da veve.

3

Epad aeis miz hint bed ene, a vessan ar frontiero,
Daket memez eur fusil, na ken neubeud ballo,
Brao oalc'h evoa dar boschet, ia donet barz in France
A pe gwir a oamb guerzed, o ia tout a avance.

4

Guerzed a oamb a esclavet, o ia gand an aotro
Pe na vele ket bean mestr, o nan kin barz ni vro,
O non glevet a da tout, o ia an aotronet
A kar aouen braz a da, deuz ar communisted.

5

Na da deg deuz ar viz mai, ma oa bet declenchet
A leusket an offensif evarnomp gand ar bochet,
Ag e ben eur miz goude, an arme e oa gered
Ag occupet tout omp bro, gant an Allemanted.

6

Occupet e oa tout ar vro gand ar Allemanted
A dustu oa kommencet konverse ar uio frited
Pad pemp bla hint bed aman, a hoccupi ar vro,
A tout ar feinanted neuz gred o fortunio.

7

Na bro, na camaraded evit ar reze na gond,
Met ar muan a villejo, o henez vo ar iond,
Na fot ket klask digante, zikour zevel ar vro,
Na reont med devi essence, a bale en auto.

8

Aman oamket prest d'ober, evel an anglijen
O na potret a merhet, enan a oant a non sifen,
Pétain e oa barz in Vrance, met ne daleket Churchill,
Goud a red kenkouls a me, henez zo bet eur huill.

9

Kar eur bloa he bet i hunan, a telhen penn dar bochet
A biskoaz war an Angleterre, o zreid na deuz poset
Tre diou vech deuz bet essaet, o ia treusit ar mor
Med bep gwech an Anglijen, a dole ne barz an dour.

10

A daou-war-uguen a viz even, en un a daou uguen,
Hitler a Mussolini, na non scovet no ven,
La caille, la tourterelle et la jolie perdrix,
O non trompet a oant bet, a lampet war ar Russie.

11

Communisted Staline, oa treited da voyou,
A na vefomp ket goal bel, a foned da Moscou,
Met henan hoarveet ket, evel aman barz in France
Ar Russie oa ket guerzed, dar bochet an avance.

12

Met ar Russie zo ken braz, da plas da haloupad,
A hint a kemmer pen ar nent da vont da Stalingrad,
A ben a ouant eru eneï e oant tout eceuret,
Kals da zoute rog dont kuit, énan na non reuded.

13

Pad ar goan a oant henait, kals a ne oa scornet,
Tri hant a tregon mille boches, enan e oa chomet,
Delojet oa ar bochet, ia tout deuz Stalingrad,
Ag a hanne ar Vermach. oa ett in debandade.

14

A dalhen a reint o hrog, betek bars eur Crimée,
Met ar russet deuz partout a re de bale,
Videt oa bet ar Russie, ebars in ber amzer
A galoupet ar bochet, ia a hane dar guer.

15

Assez drôle de manière, a guisse veket gret,
Goasoc'h evit sauvaget partout deus bet lampet,
Biken na dije kreded, na Hitler, na Pétain,
A vije bet Staline, eur hetan barz Berlin.

16

La caille, la tourterelle et la jolie perdrix
O qui chante pour Hitler et pour Mussolini
Ils sont foutu tous les deux, Hitler, Mussolini
Aussi bien Pierre Laval que Jean Hérold Paquis.

LE GAC RENÉ